

SALM 23 - (ton n° 76 el levr Kantikou)
pe n° 50

Diskan: Enor ha gloar da Vab Doue,
Jezuz, or Mestr hag or Roue!
Ni 'vo dezañ 'pad or buhe.

1. Savit uhel tal an noriou,
Dibradit, doriou peurbaduz,
Ma teuio tre 'r Roue a hloar.
2. Piou eo hennez, Roue a hloar?
An Aotrou eo, kreñv ha dispont,
An Aotrou, dispont en emgann.
3. Savit uhel tal an noriou,
Dibradit, doriou peurbaduz,
Ma teuio tre 'Roue a hloar.
4. Piou eo hennez, Roue a hloar?
An Aotrou Doue, mestr ar bed,
Henez eo ar Roue a hloar.





SALM 46 (ton n° 155 el levr Kantikou)

"Nous venons encor..." *

1. Oll boblou ar bed, stlakit ho taouarn
 ha savit ho mouez da veuli Doue.
 Bez' eo an Aotrou mestr doujet p'eb
 Roue braz an douar a-béz. tra,
2. Doue 'zav d'an neh 'kreiz eur mor
 Ouz son an drompill an Aotrou^a gan,
^a bign.
 Kanit da Zoue, kanit gloar dezañ,
 Kanit oll enor d'ar Roue.
3. Roue eo Doue war ar bed abbez,
 E rouantelez eo an oll vroiou.
 Savit kanou kaer d'an Aotrou Doue,
 Azezet war e dron santel.
4. Mistri ar poblou 'zeu d'en em staga
 ouz pobl Abraham choazet gand Doue;
 E dorn Doue 'mañ tud kreñv an douar,
 Uhel eo Doue dreist p'eb tra!
